

Stumdi : Ar stummadur uhel war ar brezhoneg

Ar staj-se a vo e bal lakaat ar vrezhonegerien (implijidi, tud dilabour, tud all) da vezañ en o bleud da vat gant ar brezhoneg dre gomz ha dre skrid.

Kinnig ar stummadur

Studiet eo bet gant an aozadur, e-pad ar bloavezh 2007, an ezhommoù ha resisaet eo bet ar stummadur (deziadoù, tud, programm...).

Kregiñ a raio, neuze, ar prantad kentañ **e Plañvour (56) eus ar 1añ a viz Gwengolo 2008 d'an 30 a viz Du 2008** (rak-enskrivadurioù niverusoc'h) ha digor e vo da veur a vrezhonegerien : an implijidi a implij ar brezhoneg war o zachenn micherel (kelennerien, kazetennerien...) hag o deus c'hoant da zoonat o anaoudegezh eus ar yezh, an dud dilabour o deus c'hoant da wellaat o live yezh a-benn kavout ur post-labour divyezhek, an dud all o deus c'hoant tapout ul live uheloc'h e brezhoneg.

Evit respont d'an ezhommoù-se e kinnig Stumdi ur staj stank-ha-stank « ober gant ar yezh », dre soubidigezh, a strolladoù adal 6 betek 10 den. Buhez e vo ar stummadur-se gant stummerien Stumdi ha gant tud eus an diavaez, kelennerien skolioù-meur en o zouez, evit stalioù ispisial hag evit prezegennoù.

Sikourioù a-benn paeañ ar stummadur

Ar stajidi (implijidi, tud dilabour) a c'hello tennañ gounid eus sikourioù (hollek pe zarnel) a-benn paeañ ar stummadur.

An implijidi a c'hello sevel o goulenn dre aozadur ehan hinieneel ar stummadur (CIF – Formiris – Afdas) a zastum skodennoù "stummadur dibaouez" gant o embregerezh (goulenn titouroù d'an implijer).

Stummadur an dud dilabour a c'hello bezañ kemeret e karg gant Rannvro Breizh (nebeut a blasoù).

Enskrivadurioù

Evit lakaat e anv a-benn heuliañ ar prantad kentañ eus ar 1añ a viz Gwengolo 2008 d'an 30 a viz Du 2008 e Plañvour (56) pe e Landerne (29) (ma vez a-walc'h a enskrivadurioù).

Goulennit ur follenn enskrivadur da :

STUMDI - BP 311 - 29800 LANDERNEAU

pgz : 02 98 21 39 94

Mel : bzh.stumdi@wanadoo.fr

Pa vo degemeret ar follenn enskrivadur leuniet e vo kinniget deoc'h un emgav.